

AN NINJERIEN

357

Ninjal di a garfen
Evel eur goulmig wenn.

WAR DON : Son ar c'hafe *pe* ar c'higer.

Bras ha bihan, pôted, merc'hed, laitou,
Deut holl da glevet, me ho ped,
Laitou, laitou, laita,
O laitou, laitou, lon la

Deut da glevet eur gananouen
'Zo bet savet d'hon ninjerien.

An ninjerien 'zo tud dispar,
'Vel 'zo nebeut war an douer*;

E lec'h ruzan e-barz ar fank,
Pa zeu piladou dour re stank,

'Lec'h pegan ouz pri an « tranche »,
An ninjerien a zav d'an nê.

Pignal 'reont e-barz an aer,
Uheloc'h 'vit an alc'houeder,

'Us d'ar mor bras, 'us d'ar c'hériou,
D'ar menezioù ha d'an tourioù;

Damdest d'al loar ha d'ar stered
'Krap bemde hon ninjerezed.

Vronjal 'reont 'barz an oabl glas,
Hevel, en noz, ouz evned-kaz.

Pa spont 'tuez hon enebourien,
Pa goue warne hon ninjerien!

Kuzan 'reont 'barz 'n o zoullou,
'N eur grenan gwasoc'h 'vit delioù.

Poultr ha luc'hed, tan ha maged
A lôska hon ninjerezed.

Dispenn 'reont ar mogerioù,
Tanan tier, diskar bourc'hioù.

Setu aze, o Kristenien,
Labour spontus an ninjerien!

An ninjerien 'zo aotrons
A gav mat boukder o gwete.

Seiz eur hanter a zo sonet,
Hag an ninjer ne zihun ket.

Savet erfin 'vit 'n em gempenn,
'N deus ezom eun eur pe ouspenn

Frizet e vleo, e varv rac'het,
Neuze 'lak e votou sired.

Tapout a ra e vanegou,
E vantel velen a aotrou;

Ha gant melli bras ez a da lenn
Kelou nevé ar gazetenn.

Klevet 'ra son d'ar patatez,
Met peilha unan 'n dije mez.

Sur mat, n'eus ket eur c'heginer.
'Zo kâb da blijout d'an ninjer.

Souben re zak, tammou kig treut,
Pato divlaz! C'hoaz re nebeut!

Hag an dra ar muian iskis
'C'h é lodenni 'r bara ken piz.

Eur c'hart vouten' vit 'pad an de l...
Stardan c'hallfet ho kof goude.

An ninjer 'zo eun den fentus:
Zoken war yun, e kan joaüs.

Bemdez, da verrât an amzer
Ec'h a d'ar « Cercle » 'vitar « c'honcert »

Eno, e c'hoarz, e huch, e youc'h,
'Vel, p'hen lac'her, a ra an houc'h.

En pevar ger setu aze
Deus an ninjerien ar vuhe.

Neb a gav 'nei pe goant pe gaer
'N deus 'met goulen 'vit bout ninjer.

An hini a zo re bouner
'Vit sevel gant e gorf en êr,

A c'hell ninjal dre e spered,
Hep krapat 'barz ninjerezed.

Ar beden a ro d'imp eskell
Da bignal d'an Tad Eternel.

Ninjomp betek tron an Drinded,
Ha kanomp: Evel-se bêt graet!

Eun Ninjer.